

Ar goas

O ! Marivon va dousik coant
 Te ne deui ket d'ar regiment
 Cals a dourmanchou
 Zo er brezel, (bis)
 Bars en tonez ar soufranzou
 E teufes da vervel

Ar plac'h

Ma vefe red din brezell
 Me rose plom d'an ennemi,
 Me zisceefe va c'hanouillou
 E crets an tan (bis)
 Vin ket plac'h treitour na lach
 Da dennar Prussian.

Ar goas

Va mestres ker e kreis an tan
 Evid eur plac'h so re a bouan
 A gant trous ar c'hanouillou
 Teufes bouzar
 A gant pers ar mitraillo
 E couefes d'an douar.

Ar plac'h

Ma ne c'han da vrezelli,
 Da renta fus d'an ennemi,
 Me a ve cantiniere.

Er regiment (bis)
 Me ranko mont ganez
 Evel gwir plac'h vaillant

Ar goas

Neuze ta va douc Marivon
 Qui efomp ou daou o c'halon
 Ben e nebeudic amzer
 Gant gras Doue (bis)
 Nin a retourne d'ar gear
 D'ar dro ha pep contre.

Partiet in d'ar regiment
 O daou gant eur c'halon contant
 Da servicha ar drapo
 In partiet, in partiet
 A beteg eur ar maro
 Velfond fidel bepred.

Cetu aze va mignonet
 Daou den en em garie parfet
 O ia bars an honestis
 A barfadet, a barfadet
 Gret evel a yaouankis
 Bezit fidel bepred.

EUN DIMEZI GRET GANT AR VAM

VAR TON : ROSET

Ar vam

Eruo eo ar moment
 Va merc'h ret eo dimezi
 A da sonjal breman
 Petra peus d'a ober
 Dadimezi breman
 D'an amzer prezant.

Ar Verc'h

Va mam ne gomzit
 Din c'hoas deus a zimezi bis
 Re yaouanck ho c'hoas
 Da von da ren ar ped
 Ne meus n'emet c'houzec vloas
 Dimezi ne rin ket.

Ar Vam

Va merc'h sent diouzin
Rag ma quittain ar bed (bis)
Gant aon em goudet
E neur gafes tromble
Ar ar rest ar vue
Malherus var ar bed.

Ar verc'h

C'hui ne noe'h duet prest c'hoas
Da mam da zout dam c'huitat
Ben nebeut blaveziou (bis)
Vui muioc'h avancet
A ben fin ho teio,
Me amo va choas gret.

Ar vam

Va merc'h eun den yuoank
A so demeus da choulen
A so den a zourè, (bis)
Hervez ma seblant din,
A deu a qualite.
Kemer n'hean hardis.

Ar verc'h

Va mam en ho cosni
Ne gleam ket ho refus,
Ma ran eur barti fall, (bis)
Neur glem na rin biken ;
Mez e'hui deut da zioal,
Ne be goude anken.

Ar vam

Va merc'h me en assur
Deus ar bez a meus laret
Gant heues vi contant (bis)
Te ma vi var ar bed ;
Dimez hep nec'hamant,
Bara did vako ket

An dimezi

Cetu ta dimezet
Ar plac'hie gant he mam
D'an osd a c'hezec vloas (bis)
Da vont da roui ar bed
A goud petra re c'hoas
Allas ! ne ouie ket.

Ar plijadur

Eur pennad e zin het
O veva gant plijadur (bis)
Sionas an erusted
E ped neo ket padus
Rag eman e deus bed
En ben gwel dangerous.

Ar dizesper

Ousquen meo, bidalve
Eo sur ive bambocher (bis)
An arc'hant a goune
An dro par an zizun
Var eur en loueet eu e de.

Ar guel Vue

Pa neur gav c'hoas er ger
E commans d'ober bue
Tollet a distollet (bis)
Alies pazardet
Cetu aze ar vue
Zo entre daou brie.

Ar vam desolet

He mam pe deus gwelet
Ar vue voa entreze
A zo pet dezoleet
O velet de gred
Malheur er merch caret
Tre vije var ar bed

Ar vis

C'houi tadou a mamou
Ne re ket evel homan
Ne deuket da bressi (bis)
Dimez ho bugale
Gant aonp evelti
O pefe keus goude.

Lesit ho pugale
Ho eun d'ober ho choas
Pa eo int rank usa (bis)
Eo just d'he c'hoas ive
Ma ne larit netra
Velle divlam goude.